



*Ar Bandennoù-Treset er Frañs*

# Deizlevr an diskouezadeg



la **citô** internationale  
de la bando dessinô  
ot do l'imago



## *La BD en France : un marché dynamique, une créativité remarquable*

La France est l'un des premiers pays de production de bandes dessinées dans le monde, le troisième en importance après les Etats-Unis et le Japon.

Le marché français de la bande dessinée peut se résumer comme suit (chiffres 2016) :

- 5 300 livres de bande dessinée publiés ;
- dont près de 4 000 nouveautés ;
- représentant 44 millions d'exemplaires (auxquels il faut ajouter 30 millions d'exemplaires d'anciens titres réimprimés) ;
- environ 400 éditeurs actifs ;
- autant de librairies spécialisées ;
- un chiffre d'affaires de 245 millions d'euros (contre 90 millions en 2000), dont moins d'un tiers réalisé par les mangas et les comics ;
- soit 9,1 % des ventes de livres, tous genres confondus.

*Source : SNE, Repères statistiques 2016-2017*

Après l'explosion de la "nouvelle bande dessinée" des années post-68 (avec Tardi, Bilal, Moebius, Boucq, Mézières, Gotlib, Bretécher, Reiser, Loisel, Juillard, Yslaire, Schuiten...), de nouvelles générations d'artistes ont pris le relais et renouvelé le "neuvième art".

Cette exposition vous présente la bande dessinée d'expression française du XXI<sup>e</sup> siècle, dans toute sa diversité.

Une exposition produite par la Cité internationale de la bande dessinée et de l'image.

Conception et rédaction :  
Thierry Groensteen

Graphisme :  
Christian Mattiucci

Merci aux auteurs et aux éditeurs qui détiennent les droits des images reproduites.

## *Ar Bandennoù-Treset er Frañs: ur marc'had nerzhus, ur speredkrouiñ heverk*

Unan eus ar broioù a saver ar muiañ a vandennoù-treset eo ar Frañs, an trede -afed niver a embannadurioù - goude ar Stadoù-Unanet ha Bro-Japan.

Setu marc'had Frañs ar bandennoù-treset en un nebeud sifroù (re 2016):

- 5 300 levr bandennoù-trest embannet ;
- en o zouez tro 4 000 outo zo nevezenti ;
- pezh a ra un hollad a 44 milion a skouerennoù (hag e ranker ouzhpennañ 30 milion a levrioù kozh adembannet)
- tro 400 embanner war ar vicher ;
- kement-all a levrديو arbennikaet ;
- ur sifr aferioù a ya da 245 milion a euroioù (pa oa erru da 90 milion e 2000), en o zouez un drederenn outo tizhet dre mangaioù ha comics ;
- pezh a gas da 9,1 % eus gwerzh an holl levrioù, forzh peseurt rumm e vefe.

*Diwar: SBE (Sindikad Broadel an Embannerien), Spisverkoù stadegoù 2016-2017*

Goude ma vefe bet eus birvilh ar « bandennoù treset nevez » er bloavezhioù goude 68 (gant Tardi, Bilal, Moebius, Boucq, Mézières, Gotlib, Bretécher, Reiser, Loisel, Juillard, Yslaire, Schuiten...), eo erruet ar rummadoù arzourien nevez, ha nevesaet ganto an « navet arz ».

En diskouezadeg-mañ e vo kinniget deoc'h liesseurted ar bandennoù-treset gallek er XXI<sup>vet</sup> kantved.

Un diskouezadeg savet gant -Kêr etrevroadel ar bandennoù-treset hag ar skeudennoù.

Savet ha skrivet gant:  
Thierry Groensteen

Graferezh:  
Christian Mattiucci

Trugarez vras d'ar skrivagnerien, tresourien hag embannerien a zo ganto gwirioù ar skeudennoù kinniget deoc'h.

## Le renouveau de la bande dessinée de genre

### *Science-fiction*

Le dessin permet d'inventer à moindres frais le futur ou de nous faire visiter d'autres mondes possibles.

La BD de science-fiction française compte de nombreux classiques, tels les Pionniers de l'Espérance de Poïvet et Lécureux, Lone Sloane de Druillet ou Valérien de Mézières et Christin.

Voici, choisies dans la production récente, trois grandes sagas de forme classique et trois œuvres qui le sont moins.

L'agent spécial Nävis est le seul personnage humain de la série Sillage{2}, pour laquelle Philippe Buchet et Jean-David Morvan inventent des planètes et des races multiples, ainsi qu'un riche bestiaire.<2}

Autour de l'idée d'une guerre universelle qui commence avec l'apparition d'un mur énigmatique et terrifiant au cœur du système solaire, Denis Bajram, dans Universal War One, développe une trame sombre utilisant des boucles temporelles. Dans un deuxième cycle indépendant du premier, Universal War Two, une nouvelle apocalypse commence.

On retrouve une trame spatio-temporelle complexe dans Prométhée, de Christophe Bec, dont le point de départ, inspiré de la littérature pseudo-scientifique des années 60-70, est une série de phénomènes inexplicables qui frappent la Terre à partir du 21 septembre 2019, chaque jour à la même heure.

Le space opera se teinte de comédie jubilatoire dans Infinity 8, série pour laquelle Lewis Trondheim s'est entouré de treize co-scénaristes et dessinateurs.

Au programme : des héroïnes sexy, des monstres nécrophages et Hitler qui reprend du service !

Aâma est le nom d'une substance qui ne se trouve que sur la planète Ona(ji), une planète encore au début de son développement.

Frederik Peeters y envoie son héros Verloc Nim, pour un voyage pour le moins dépaysant dont les enjeux scientifiques cèdent finalement le pas devant un questionnement intime sur la paternité.

Souvenirs de l'empire de l'atome, d'Alexandre Clérisse et Thierry Smolderen, est un hommage à l'âge d'or de la littérature de science-fiction et s'inspire d'ailleurs de la vie de l'écrivain américain Cordwainer Smith.

## Nevezadur ar bandennoù-treset rummad

### *Skiant-faltazi*

Ne goust ket ker sevel an amzer da zont, pe lakaat lennerien da weladenniñ bedoù all posupl, pa vezont treset hepken.

Oberennoù- klasel a gaver er BT skiantfaltazi gall, evel da skouer Les Pionniers de l'Espérance (Diorrierien ar Spi) gant Poïvet ha Lécureux, Lone Sloane gant Druillet, pe c'hoazh Valérien gant Mézières ha Christin.

Sed aze e-touez an albomoù nevez-savet, tri saga meur, klasel o stumm, ha teir oberenn all, ha n'int ket ken klasel.

An dudenn denel nemetken eo ar gwazour arbennik Nävis en heuliadenn Sillage (Roudenn). Enni e weler planedennoù ha gouennoù liesseurt, koulz ha loened hag anevaled, savet gant Philippe Buchet ha Jean-David Morvan.

Framm teñval un istor a implij rodelladoù-amzer zo bet savet gant Denis Bajram en e Universal War One (Brezel Hollvedel Kentañ), istor ur brezel hollvedel a grog gant ur voger gevrunus ha spontus o tifoupañ e kalon koskoriad an heol. En un eil kelc'hiad, Universal War Two (Eil Brezel Hollvedel), emren diwar an hini kentañ, e krog un Apokalips nevez.

Adkavout a reer ur -steuenn egor-amzer luziet evel e-barzh Prometeus, gant Christophe Bec. Awenet eo an istor gant al lennegezh dam-skiantel ar bloavezhioù 60-70, ha loc'hañ a ra gant un heuliad darvoudoù dizispleg hag a sko an Douar adalek an 21 a viz Gwengolo 2019, bemdez d'ar memes eur.

Ur space-opera mesket gant farsadennoù bourrapl, setu Infinity 8, un heuliadenn savet gant Lewis Trondheim ha trizek a gen-skrivagnerien ha tresourien.

War ar roll, harozezed seksi, euzhviled -debrerien korfoù marv, hag Hitler deuet endro a varv da vev !

Aâma zo anv un danvez ha ne gaver nemet war blanedenn Ona(ji), ur blanedenn ha ne ra nemet loc'hañ gant he diorren.

Frederik Peeters a gas di e haroz Verloc Nim -evit ur veaj divoas un tamm mat, hag eo an dalc'hoù skiantel a blego a-benn ar fin dirak goulennoù don diwarbenn an dadelezh.

Rentañ enor da oadvezh aour al lennegezh skiant-faltazi, setu pezh a ra Souvenirs de l'empire de l'atome (Eñvorennoù impalaerez an atom), gant Alexandre Clérisse ha Thierry Smolderen, awenet e gwirionez gant buhez ar skrivagner amerikan Cordwainer Smith.



## *Le polar*

Récit d'énigme, polar noir ou thriller, toutes les formes d'intrigues policières se retrouvent dans la BD, qui peut même rhabiller les detective stories aux couleurs du zoomorphisme (Blacksad, de Canales et Guarnido).

Chez ce remarquable dialoguiste et metteur en scène qu'est Anthony Pastor, les personnages sont des cabossés de la vie, comme le poète Osvaldo Brown et la détective Sally Salinger, qui partagent l'affiche de Castilla Drive puis de Bonbons atomiques.

Maggy Garrisson est le nom d'une chômeuse qui se mue en enquêtrice, créée par Stéphane Oiry et Lewis Trondheim.

Elle survit grâce à ses enquêtes tout en se mettant en couple avec un petit délinquant.

Un polar social très réaliste, dans la métropole londonienne.

D'autres auteurs choisissent un registre encore plus sombre.

Quand Christian De Metter adapte le thriller de Dennis Lahane Shutter Island, il utilise toute une gamme de tons verdâtres pour en renforcer l'ambiance angoissante.

Le grotesque se mêle à un univers très noir dans Le Roi des mouches, de Mezzo et Pirus, série en quatre albums où l'humanité tout entière semble tombée en déliquescence.

Blast, de Larcenet, se caractérise aussi par son âpreté.

Aucun lecteur n'oubliera Polza Mancini, un homme de 150 kilos, en rupture de société, soupçonné de meurtre par la police.

Soumis à un long et interrogatoire, il livre une confession bouleversante, jouant au chat et à la souris avec ses géôliers.

Tandis que dans Prosopopus, Nicolas de Crécy réussit l'exploit de raconter, sans le secours des mots, la descente aux enfers d'un tueur à gages qui ne s'est pas remis de son dernier contrat.

## *Ar romantoù polis*

Danevell luziadell, romant-polis du pe romant-skrij, a bep seurt itrikoù polis a gaver er bandennoù-treset, ha pa 'z int gouest adwiskañ an detective stories (istorioù igounierien) gant livioù al loen-heñvelaat zoken (Blacksad, gant Canales ha Guarnido).

Treset gant Anthony Pastor, leurenner ha saver-divizoù eus ar c'hentañ, daou zen bet bloñset gant darvoudoù ar vuhez, ar barzh Oswald Brown, hag an igounierez Sally Salinger, o-daou penn-tudennoù en albomoù Castilla Drive ha Bonbons atomiques (Madigou atomek).

Maggy Garrisson a zo anv ur vaouez dilabour zo deuet da vezañ enklaskerez en istorioù savet gant Stéphane Oiry ha Lewis Trondheim.

Bev e chom a-drugarez d'hec'h enklaskoù, ha sevel a ra tiegezh gant ul lustrugenn.

Ur romant-polis sokial ha realour a dremen e meur gêr Londrez.

Gant skrivagnerien all ez eus bet dibabet arlivioù teñvaloc'h c'hoazh.

P'en em lak Christian De Metter da azasaat romant-skrij Dennis Lahane Shutter Island, ec'h implij evit se an holl arlivioù dam-wer evit donaat an aergelc'h skrijus a-walc'h dija.

Ur bed teñval ha droch a weler e Le Roi des mouches (Roue ar c'helien) gant Mezzo ha Pirus, un heuliadenn peder levrenn ma weler enni an denezh aet war semplaat.

Blast, gant Larcenet, un istor c'hwerv ma'z eus unan.

Ne vo gouest lenner ebet disoñjal Polza Mancini, ur gwaz a 150 kg a bouez, broc'het gant ar gevredigezh, ha lakaet diskred ur muntr warnañ.

Aterset eo dre ret gant ar polis e-pad hir amzer, ha ranngalonus eo pezh a ro da gofesaat, dre ma c'hoari redek gant e jolierien.

Padal e-barzh Prosopopus e teu a-benn Nicolas de Crécy da gontañ istor ul lazher gopret ha n'en deus ket aesaet dezhañ e spered abaoe a gontrad diwezhañ.

## *L'Heroic Fantasy*

Sous-genre de la littérature fantastique, l'heroic fantasy a la faveur des adolescents depuis les années 1980.

Elle inspire une nouvelle génération de dessinateurs, nourris de Tolkien (Le Seigneur des Anneaux) et, pour certains, de Robert E. Howard (Conan).

Voici trois séries à connaître.

Lanfeust de Troy, de Didier Tarquin et Christophe Arleston, un forgeron un peu naïf, évolue parmi une faune extrêmement variée. Devenue un véritable phénomène éditorial, la série a inspiré plusieurs cycles annexes se situant dans le même monde magique de Troy : Lanfeust Odyssey, Trolls de Troy, Les Légendes de Troy, etc.

Mal-aimé dans son village, l'anti-héros cynique Ralph Azham va vivre une grande aventure aux côtés de Yassou, un enfant transformé en vieillard.

Entre religion et magie, Lewis Trondheim développe un univers à ramifications, avec cette dose d'ironie qui est sa marque de fabrique.

Dans l'empire de Jésameth, où les religieux ont tous les pouvoirs, des sirènes tueuses viennent s'échouer sur les plages. Alim le tanneur, un hors-caste,

fait une découverte qui va bouleverser l'histoire de l'empire et l'obliger à fuir.

Cette série écrite par Wilfried Lupano révèle une dessinatrice de talent, Virginie Augustin.

## *An Heroic Fantasy*

Is-rummad el lennegezh moliac'h, an heroic fantasy a zo muiañ-karet ar grennarded abaoe ar bloavezhioù 1980.

Awenet eo bet gantañ ur rummad nevez a dresourien, maget gant oberennoù Tolkien (Aotroù ar Gwalennoù) hag, evit lod all, gant Robert E. Howard (Conan).

Setu an teir heuliadenn a ranker anavezout.

Lanfeust Troy, gant Didier Tarquin ha Christophe Arleston, istor ur gov eeunek un tamm, a ra e jeu e-touez loenedoù liesseurtre.

Un doare burzhud e bed an embann eo an heuliad, hag awenet en deus kelc'hioù stag outañ met lec'hiet er memes bed hud hag hini Troy: Lanfeust Odyssey, Trolled Troy, Mojennoù Troy, ha kement zo...

Dre ma oa brud fall warnañ en e gêr, Ralph Azham an enep-haroz

goapaer a ya da vevañ un dro-gaer veur ; en e gichen, Yassou, ur bugel troet da gozhiad.

Etre relijion hag hudouriezh, Lewis Trondheim a zigor evidomp ur bed leun a vrec'hennoù, gant e zoare dezhañ e-unan da vestroniañ ar mousfent.

En impalaeriezh Jesameth emañ an holl c'halloudoù etre daouarn ar veleien.

Dont a ra morganezed lazherezed da skeiñ ouzh an aodoù.

Alim ar c'hivijer, un den er-maez kast, a ra ur gavadenn a zo o vont da eilpenañ istor an impalaeriezh, ha rediañ anezhañ da gemer an tec'h.

Un heuliad skrivet gant Wilfried Lupano hag a ro tro d'un dresourez donezonet, Virginie Augustin, da zispakañ hec'h arz.

### *L'histoire d'hier...*

Les dessinateurs ont toujours aimé les récits « en costumes » et ont visité toutes les périodes de l'Histoire.

L'Antiquité reste très prisée, avec des séries spectaculaires telles que Murena, de Jean Dufaux et Philippe Delaby, dont l'empereur Néron est la figure centrale, ou Alix Senator, de Valérie Mangin et Thierry Démarez, qui fait vieillir le personnage d'Alix créé en 1948 par Jacques Martin, le déplaçant du règne de César à celui d'Auguste.

Matthieu Bonhomme explore le Moyen Age dans Messire Guillaume (avec Gwen De Bonneval), où le thème de la quête du père se teinte d'éléments fantastiques, et le XVIIe siècle dans Le Marquis d'Anaon (avec Fabien Vehlmann), où un esprit

curieux et pré-scientifique se heurte aux croyances dans le surnaturel.

Lionel Ambre et David Vandermeulen ressuscitent une page sombre de la Renaissance dans La Passion des Anabaptistes.

Dans leur trilogie Révolution, Florent Grouazel et Younn Locard ressuscitent avec fougue et enthousiasme la Révolution française, en se tenant au plus près du peuple.

Chloé Cruchaudet imagine le voyage d'une femme, Ida, dans l'Afrique du XIXe siècle.

### *Istor dec'h...*

A-viskoazh eo bet plijet-bras an dresourien gant an istorioù gizgwechall, « gant gwiskamantoù », ha tro o deus bet da weladenniñ holl mareoù an Istor evel-se.

Plijet-bras int gant an Henamzer, en heuliadoù kaer da arvestiñ evel Murena, gant Jean Dufaux ha Philippe Delaby, ennañ an impalaer Nero an dudenn bennañ, pe Alix Senator, gant Valérie Mangin ha Thierry Démarez, o deus lakaet da goshaat an dudenn Alix, an hini a oa bet savet gant Jaques Martin e 1948, ha dilec'hiet o deus anezhañ eus ren Kezar da hini Aogust.

Gant Matthieu Bonhomme e reomp ergerzhadennoù er Grennamzer e-barzh Messire Guillaume (Aotrou Gwilherm) gant Gwen De Bonneval. Ennañ ez eo mesket ar gest evit an tad hag elfennoù moliac'h, hag ar

XVIIvet kantved e-barzh Le Marquis d'Anaon (Markiz an Anaon) gant Fabien Vehlmann, e-lec'h ma rank un den kurius ha rak-skiantel e spered, talañ ouzh ar c'hredennoù en darvoudoù dreist-naturel.

Lionel Ambre ha David Vandermeulen a gas da vev en-dro ur bajennad deñval eus istor an Adginivelezh e-barzh La Passion des Anabaptistes (Pasion an Advadezourien).

En o zrilogezh Révolution (Dispac'h), Florent Grouazel ha Younn Locard a lak da vevañ en-dro mare an Dispac'h Gall gant birvilh ha tan, met dre selloù ar bobl vunud.

Gant Chloé Cruchaudet eo poltredet beaj ijinet ur vaouez, Ida, en Afrika an XIXvet kantved.

### *... et celle d'aujourd'hui*

La bande dessinée interroge aussi, avec une acuité particulière, les grands événements du XXe siècle, fouillant dans une mémoire plus récente.

Ainsi Sfar évoque-t-il l'Algérie coloniale du début du XXe siècle dans *Le Chat du Rabbín*.

La guerre de 14-18 inspire à Chloé Cruchaudet le remarquable *Mauvais genre*, dans lequel un déserteur se cache sous un costume de femme, tandis que David Vandermeulen dessine la biographie du savant allemand Fritz Haber, considéré comme le père de l'« arme chimique ».

Jean-Philippe Stassen, lui, témoigne du génocide perpétré au Rwanda en 1994 dans *Deogratias*.

La Seconde Guerre mondiale est la période choisie par Emmanuel Guibert, qui, dans *La Guerre d'Alan*, met en images les souvenirs du vétéran américain Alan Ingram Cope.

Fabien Nury et Sylvain Vallée, dans *Il était une fois en France*, évoquent

la singulière personnalité de Joseph Joanovici, un ferrailleur juif roumain qui, semble-t-il, finança la Résistance tout en étant proche de la Gestapo parisienne.

*Kkrist Mirror* rend un hommage très documenté aux victimes oubliées du conflit dans *Tsiganes : une mémoire française, 1940-1946*.

On mentionnera aussi la série *Jour J*, scénarisée par Jean-Pierre Pécau et Fred Duval, qui explore des versions alternatives de certains événements clés du XXe siècle : et si les Russes avaient marché sur la Lune avant les Américains ?

Et si l'Allemagne avait gagné la Première Guerre mondiale ?

### *... hag hini hiriv an deiz*

Gant ar bandennoù-treset e saver goulennoù ivez, ha goulennoù lemm. Lakaet omp neuze da furchal e barzh eñvorennoù darvoudoù meur an XXvet kantved, ur prantad istor tostoc'h diouzhomp.

Sfar, da skouer, a gas ar gaoz war Aljeria da vare an trevadennoù, e penn-kentañ an XXvet kantved, e-barzh *Le Chat du Rabbín* (Kazh ar Rabin).

Gant ar Brezelbed kentañ eo awenet Chloé Cruchaudet en hec'h oberenn gaer *Mauvais genre*

(Doareet-fall), enni un dizertour a glask kuzhat dindan ur gwiskamant plac'h.

Diouzh e du emañ David Vandermeulen o tresañ buhezskrid ar gouizieg alaman Fritz Haber, kontet evel tad an « armoù kimiek ».

Jean-Philippe Stassen a ro deomp un testeni eus ar ouenn-lazhadeg bet kaset da benn er Rwanda e 1994 e-barzh *Deogratias*.

Prantad an Eil Brezel-bed eo hag a zo bet dibabet gant Emmanuel Guibert

en e levr *La Guerre d'Alan* (Brezel Alan), ha skeudenniñ a ra eñvorennoù ar vétéran amerikan Alan Ingram Cope.

Fabien Nury ha Sylvain Vallée, en o *Il était une fois en France* (Ur wech e oa er Frañs) a gas ar gaoz war bersonelezh souezhus Joseph Joanovici, un houarnacher yuzev roumanat hag a veze oc'h arc'hantaouiñ ar Rezistañs, padal e chome tost ouzh Gestapo e Pariz.

En e oberenn dafaret don, *Tsiganes: une mémoire française, 1940-1946* (Tziganed, ur memor er Frañs, 1940-1946), *Kkrist Mirror* a zoug bri da reuzidi bet disoñjet er brezel.

Dav eo menegiñ ivez an heuliad *Jour J* (Deiz D), senariet gant Jean-Pierre Pécau ha Fred Duval, a gas da ergerzhout doareoù disheñvel eus darvoudoù a-bouezbras an XXvet kantved: ha ma vefe deuet a-benn ar Rusianed da vont war al loar a-raok an Amerikaned?

Ha ma vefe bet gounezet ar Brezel Bed kentañ gant an Alamaned?

## La mise en scène du Moi

Les dessinateurs de l'underground américain ont été parmi les premiers à se mettre eux-mêmes en scène comme protagonistes de récits à caractère intime, au début des années 70.

En France, ce sont les éditeurs dits alternatifs qui, les premiers, favorisent l'essor du récit autobiographique.

La petite maison d'édition Ego comme X en fait sa spécialité. Fabrice Neaud en est l'un des cofondateurs. Dans son Journal (quatre volumes entre 1996 et 2002), il évoque sans tabou son vécu de jeune homosexuel dans une petite ville de province.

Arrivée en France en 1994, l'Iranienne Marjane Satrapi conquiert une célébrité mondiale en illustrant, dans Persepolis, la fin du régime du Shah, la révolution khomeiniste et l'instauration de la dictature des mollahs, telle qu'elle les a vécues avec sa famille.

Persepolis paraît à l'Association, dont plusieurs des fondateurs

publient eux aussi des œuvres autobiographiques importantes :

Lewis Trondheim (Approximativement), Jean-Christophe Menu (Livret de Phamille), David B (L'Ascension du Haut Mal) ou Mattt Konture (Autopsy d'un mort vivant).

Une autre enfance passée au Moyen-Orient (en Syrie et en Libye) est celle de Riad Sattouf, qu'il conte depuis 2014 dans la série à succès L'Arabe du futur.

Mémoires, témoignage, autofiction, journal intime, récits de rêve, carnet, blogue : l'autobiographie prend désormais des formes multiples, depuis les Carnets très spontanés de Joann Sfar jusqu'au récit très construit Faire semblant c'est mentir (2007) de la dessinatrice belge Dominique Goblet en passant par bien d'autres albums marquants signés de Zeina Abirached, Aurelia Aurita, Mathieu Blanchin, Rachel Deville, Benoît Jacques, Olivier Josso, Xavier Mussat et Aude Picault, pour ne citer qu'eux.

## Leurrenniñ ar Me

Adalek ar bloavezhioù 70 eo bet tresourien an underground-amerikan e-touez ar re gentañ- d'en em leurrenniñ o-unan, ha da vezañ penn-dudenn istorioù o buhez prevez.

Er Frañs eo an embannerien alternativel o deus digoret an hent d'an istorioù danevelloù buhez.

Fabrice Neaud zo unan eus ken-grouerien an ti-embann bihan Ego comme X (Ego evel X), arbennikaet en doare-skridoù-se. En e Journal (Deiziataer), peder levrenn etre 1996 ha 2002, e kas ar gaoz diwar-benn e vuhez a heñvelreizh yaouank en ur gêr vihan er broviñs.

Erruet eo an Iranadez Marjan Satrapi er Frañs er bloaz 1994, ha pakañ a ra ur brud etrevroadel en ur dresañ dibenn ren ar Shah, an dispac'h kaset en-dro gant Khomeini, ha diazez diktaturiezh ar Vollahed, evel m'eo bet bevet ganti ha gant he familh.

Embannet eo bet Persepolis gant l'Association, ha meur a hini e-touez ken-saverien an ti-se o deus

embannet ivez oberennoù buhezskrid abouez:

Lewis Trondheim (Approximativement - Mui pe vui), Jean-Christophe Menu (Livret de Phamille - Levrenn Phamilh), David B (L'Ascension du Haut Mal – Pignerezh an Drouguhel) pe Mattt Konture (Autopsy d'un mort vivant -Em-psi un anvarvad).

Ur yaouankiz all bet tremenet er Reter Nesañ (e Syria hag e Libya), hini- Riad Sattouf, kontet gantañ abaoe 2014 en heuliad mil-brudet L'Arabe du futur (Arab an dazont).

Eñvorennoù, testenioù, em-faltazi, deizlevr prevez, hunvreoù kontet, karned, blog: meur a stumm a gaver hiriv an deiz d'an emvuhezskrid, adalek Carnets (Karnedoù) emfaltazi Joann Sfar, betek an istor peur-savet Faire semblant c'est mentir (Kontañ gevier eo ober van) e 2007, gant an dresourez Dominique Goblet a Velgia, en ur dremen dre veur a albom heverk sinet gant Zeina Abirached, Aurelia Aurita, Mathieu Blanchin, Rachel Deville, Benoît Jacques, Olivier Josso, Xavier Mussat et Aude Picault, e-touez re all.



## La vie comme elle va

Le quotidien, l'intimité, le temps qui passe, la vie comme elle va, toutes ces dimensions ont aussi gagné la fiction, inspirant des auteurs qui tournent le dos à la «grande aventure» mais qui, plutôt que de parler d'eux-mêmes, préfèrent inventer des personnages pour dire le monde actuel – une tendance dont Martin Veyron (Bernard Lermite), Jean-Claude Denis (Luc Leroi) puis Dupuy et Berberian (Monsieur Jean) s'étaient fait les précurseurs.

Michel Rabagliati le fait à travers Paul, un père de famille dont il chronique la vie depuis 1998.

Pascal Rabaté porte un regard satirique mais tendre sur la France populaire (Les Petits Ruisseaux, La Marie en plastique, avec Prudhomme).

Camille Jourdy tisse des intrigues souriantes en transfigurant la vie de personnages banals (Rosalie Blum, Juliette).

Cyril Pedrosa brode des fictions existentielles amples sur des sujets ténus (Portugal, Les Équinoxes).

Chez Eric Lambé (Paysage après la bataille, avec Jacques de Pierpont), une jeune femme endeuillée se reconstruit dans un camping-caravaning sous la neige.

François Matton célèbre, à travers un dessin-écriture poétique, tout ce qui l'entoure, ce qu'il appelle «les infinies manifestations du même».

Dans sa série des Petits Riens, Lewis Trondheim fixe sur le papier des moments anecdotiques, des choses vues ou entendues.

## Ar vuhez e-giz ma teu

Ar vuhez bemdeziek, ar vuhez prevez, an amzer a dro, kement a stummoù a zo aet war-zu ar faltazi, hag awenet evel-se arzourien o deus troet o c'hein ouzh an «troioùkaer», evit dibab kaozeal diwar o fenn o-unan kentoc'h. Gwelloc'h e kavont sevel tudennoù evit komz eus ar bed a-vremañ –un tech a oa loc'het gant Martin Veyron (Bernard Lermite), Jean-Claude Denis (Luc Leroi) ha goude-se Dupuy ha Berberian (Monsieur Jean).

Michel Rabagliati a ra ar memestra gant e dudenn Paul, un tad a familh a vez kontet e vuhez dezhañ abaoe 1998.

Pascal Rabaté a daol e selloù flemmus ha tener war Frañs an dud vunud (Les Petits Ruisseaux - Ar gwazhioùigoù, La Marie en plastique - Mari-plastik, gant Prudhomme).

Camille Jourdy a vez o wriat itrikoù mousc'hoarzhus en ur

bennboelliñ buhez tud ordinal (Rosalie Blum, Juliette).

Cyril Pedrosa a vez o vrodiñ buhezioù faltazius ledan war danvezioù tener (Portugal, Les Équinoxes - Revezhioù).

Gant Eric Lambé (Paysage après la bataille - Ardremez war-lerc'h an emgann), gant Jacques de Pierpont), e kaver un intañvez yaouank a glask adsevel he buhez, e-keit m'emañ o chom en ur c'hamping-caravaning- dindan an erc'h.

Lidañ a ra François Matton pezh a vez tro-dro dezhañ, anvet gantañ «testenioù didermen an hevelep hini».

En e heuliad Petits Riens (Traoùigoù), Lewis Trondheim a lak war ar paper pennadoùigoù dister, traoù bet gwelet pe klevet.

## Le sens de l'engagement

Les auteurs ne se contentent pas toujours d'être des témoins, des reporters, certains s'engagent et défendent des causes qui leur tiennent à cœur.

Philippe Squarzone avait montré l'exemple avec son diptyque Garduno, en temps de paix / Zapata, en temps de guerre (2002-2003), inspiré par ses deux séjours au Chiapas et son militantisme au sein de l'association Attac.

Dans Saison brune (2003), il alerte sur les dangers du réchauffement climatique.

Dans ses livres, Étienne Davodeau aborde des questions telles que le conflit entre l'agriculture biologique et l'agriculture productiviste (Rural !, 2001) et les « années de plomb de la Ve République » (Cher pays de notre enfance, 2015), ou bien évoque la grève d'avril 1950 à Brest, marquée par la mort d'un syndicaliste (Un homme est mort, 2006).

Chantal Montellier n'a cessé d'affirmer son engagement, politique, social et féministe.

Après plus de quarante ans de carrière, elle n'a pas abdicé, comme en

témoignent des livres récents comme Les Damnés de Nanterre (2005, sur la violence d'Etat), Tchernobyl mon amour (2006, sur les dangers du nucléaire) ou L'Insoumise (2013, sur le mal-logement).

Plusieurs dessinateurs (Farid Boudjellal, Jean-Christophe Chauzy) ont publié des albums contre Marine Le Pen et son mouvement d'extrême-droite Le Front national (aujourd'hui Rassemblement national).

D'autres choisissent de s'intéresser aux soubresauts du monde, notamment au Moyen-Orient :

L'Attentat, de Loïc Dauvillier et Glen Chapron (2012), aborde le conflit israélo-palestinien, tandis que L'Appel, de Laurent Galandon et Dominique Mermoux (2016) interroge le phénomène du djihad.

## Ster an engouestladur

N'eo ket a-walc'h bepred bezañ testoù pe kelaouennerien, lod eus an arזורien a zo tud engouestlet, ha harpañ a reont ar stourmoù tost ouzh o c'halon.

Philippe Squarzone en doa diskouezet ar skouer vat gant e zivdaoladenn Garduno, en temps de paix / Zapata, en temps de guerre - Garduno da goulz ar peoc'h / Zapata da goulz ar brezel (2002-2003), awenet ma oa bet pa oa bet dre ziv wech o chom er Chiapas, ha gant e stourmoù e-kreiz ar gevredigezh Attac. E-barzh Saison brune - Koulzad rouzdu (2003), e lak e lennerien da brederiañ war zañjerioù tommadur an hin.

En e levrioù e ya Étienne Davodeau a-benn da c'houlennoù evel ar stourmoù etre al labour-douar biologel hag al labourdouar produadurouriezh (Rural ! - War ar maez !, 2001) ha «bloavezhioù feulster ar Vvet Republik» (Cher pays de notre enfance - Bro gaer ma yaouankiz 2015), pe c'hoazh e ra meneg eus harzlabour miz Ebrel 1950 e Brest, skoet don gant marv ur sindikalour (Un homme est mort - Un den zo marvet, 2006).

N'he deus ket paouezet Chantal Montellier da lakaat war-wel hec'h

engouestladur politikel, sokial, ha gwregelour.

War-lerc'h un daou-ugent vloaz bennak war ar vicher, n'he deus ket pleget gwech ebet, evel ma c'heller gwelet en he levrioù diwezhañ, evel Les Damnés de Nanterre - Daonidi Nanterre (2005, diwar-benn feulster ar Stad), Tchernobyl mon amour - (Tchernobyl ma c'harantez 2006), diwar-benn dañjerioù an nukleel, pe L'Insoumise - An Disujez (2013, diwar-benn ar fall-lojañ).

Gant meur a dresour (Farid Boudjellal, Jean-Christophe Chauzy) ez eus bet embannet albomoù a-enep da Marine Le Pen hag he strollad eus an tu-dehou pellañ, an Talbenn Vroadel (an Unvaniezh Vroadel hiriv an deiz).

Re all a zibab teurel pled ouzh stokadoù ar bed, er Reter Nesañ da skouer:

L'Attentat (Ar Gwall-daol) gant Loïc Dauvillier ha Glen Chapron (2012), a bled ouzh ar stourm Israel-Palestina. Diouzh un tu all L'Appel (Ar Galv) gant Laurent Galandon ha Dominique Mermoux (2016) a sav goulennoù diwarbenn c'hoarvoudoù an djihad.

**Quand la bande dessinée célèbre l'art et les artistes**

La quasi-totalité des plus grands noms de l'histoire de l'art ont vu leur vie racontée en bande dessinée :

Picasso, Modigliani, Kahlo, Van Gogh, Dali, Pascin, Chagall, Klee, Rembrandt, Le Caravage, Munch, Schiele, Goya, Hokusai, Léonard, Courbet, Bourdelle... Tous ont fait l'objet d'albums (certains en ont même inspiré plusieurs) animés d'intentions plus ou moins didactiques.

Ces biographies sont l'occasion, pour les dessinateurs, d'engager un dialogue avec la peinture, de se confronter à des images d'une autre nature, utilisant d'autres techniques et relevant de formats différents.

Les albums se distinguent par l'angle que choisit de privilégier le récit biographique, l'éclairage projeté sur l'homme et l'œuvre.

Certains (comme le Pablo de Julie Birmant et Clément Oubrierie, consacré à Picasso) se focalisent sur la vie de l'artiste proprement dite, y compris dans ses aspects les plus privés, ou à travers ses épisodes devenus légendaires ; d'autres utilisent la figure principale comme prétexte pour évoquer un milieu artistique, un contexte historique (voir notamment le Chagall de Joann Sfar) ; d'autres enfin s'intéressent plus

directement à l'aventure de la création, prennent le risque de se confronter au grand mystère de l'art (voir l'album Alberto G, sur Giacometti, de Jacques de Pierpont et Eric Lambé).

La plupart font un peu de tout cela.

**Pa veze lidet an arz hag an arzourien gant ar bandennoù-treset**

Buhez darn vras arzourien veur istor an arzoù zo bet kontet en ur vandenn-dreset:

Picasso, Modigliani, Kahlo, Van Gogh, Dali, Pascin, Chagall, Klee, Rembrandt, Caravaggio, Munch, Schiele, Goya, Hokusai, Leonard, Courbet, Bourdelle... An holl rese o deus bet o foltred en un albom (e meur a hini zoken evit lod outo), gant ur soñj pedagogel, mui pe vui.

Evit an dresourien ez eo ar buhez-skridoù-se un digarez da gas un diviz gant al liverezh, da lakaat skeudenoù da enebiñ an eil ouzh eben, pa 'z int bet savet en ur implijout teknikoù ha war stummoù disheñvel.

Disheñvel eo an eil albom ouzh egile, hervez ar sav-poent bet dibabet evit kontañ ur vuhez-skrid, hervez ar gouloù a vo taolet war an den ha war e oberenn.

Lod da skouer, evel Pablo, gant Julie Birmant ha Clément Oubrierie, gouestlet da Picasso, zo kreizennet war vuhez wirion an den, betek al lodennoù prevesañ, pe dre zegouezhioù deuet da vezañ mojennel.

Lod all a implij an dudenn bennañ da zigarez evit menegiñ ar metoù arzel, un endro istorel, (ar Chagall- da skouer gant

Joann Sfar). Lod all c'hoazh a bled war-eeun gant tro-gaer ar grouidigezh, hag e kemeront ar riskl da dalañ ouzh kevrin meur an arzoù (sellit ouzh albom Alberto G-, diwar-benn Giacometti, gant Jacques de Pierpont hag Eric Lambé).

Met darn vras an albomoù a bled gant a bep seurt.

## Quand le cinéma se nourrit de la bande dessinée

Les super-héros de Marvel et de DC ne sont pas les seuls personnages de bande dessinée à avoir envahi les salles de cinéma.

Deux des plus gros succès de ces dernières années, en termes de nombre d'entrées, ont été Astérix :

Mission Cléopâtre, réalisé par Alain Chabat (6,8 millions de spectateurs français en salles) et Tintin : le secret de la Licorne, de Steven Spielberg (5,3 millions d'entrées).

Au-delà de ces blockbusters, les films français qui puisent leur sujet dans une bande dessinée sont de plus en plus nombreux.

Quelquefois, le film est réalisé par le dessinateur lui-même, passé derrière la caméra et devenu son propre adaptateur : ainsi Joann Sfar pour Le Chat du rabbin (2011), Marjane Satrapi pour Persepolis (2007, avec Vincent Paronnaud) ou Pascal Rabaté pour Les Petits Ruisseaux (2010).

Auteur de bande dessinée à succès et réalisateur, Riad Sattouf préfère, quant à lui, tourner des scénarios originaux (Les Beaux Gosses, 2009).

Beaucoup d'autres réalisateurs trouvent désormais dans la BD une matière qui stimule leur imaginaire, y compris de grands noms du 7e Art :

La Vie d'Adèle par Abdellatif Kechiche (2013, Palme d'or à Cannes) est inspiré d'un album de Julie Maroh ; Luc Besson porte Valérian à l'écran en 2017, d'après la série de Christin et Mézières, après avoir déjà adapté Les Aventures extraordinaires d'Adèle Blanc-Sec de Tardi en 2010.

Bertrand Tavernier tire une comédie savoureuse de l'album à succès de Christophe Blain et Abel Lanzac Quai d'Orsay, qui dévoile les coulisses du ministère des Affaires étrangères, et Bruno Podalydès redonne vie, en 2018, à la plus que centenaire Bécassine.

Rosalie Blum, de Camille Jourdy, Seuls, de Vehlmann et Gazzotti, Le Petit Spirou, de Tome et Janry, Zombillenium, d'Arthur De Pins, ainsi que La Mort de Staline, de Nury et Robin, sont parmi les autres bandes dessinées qui ont récemment connu une seconde vie à l'écran.

## P'eo maget ar sinema gant ar bandennoù-treset

Dreist-harozed Marvel ha DC n'int ket an tudennoù bandennoù-treset nemeto o deus bet aloubet ar salioù sinema.

Daou diwar ar filmoù o doa graet berzh vras er bloavezhioù tremenet, pa gomzer eus niver a antreoù bet gwerzhet, e kaver Astérix:

Mission Cléopâtre (Asteriks, Mision Kleopatra), sevenet gant Alain Chabat (6,8 milion a arvesterien e salioù sinema Frañs) ha Tintin: le secret de la Licorne.(Tintin ha sekred an Unkorneg) gant Steven Spielberg (5,3 milion a antreoù).

En tu all eus ar blockbusters-se, ez eo niverusoc'h ar filmoù gall o deus tennet o awen diwar ur vandenn-dreset eget pezh a soñjer alies.

Gwechoù zo ez eo sevenet ar film gant an tresour e-unan, aet en tu-dreñv d'ar c'hamera hag azasaet ar film gantañ e-unan: evel-se en deus graet Joann Sfar evit Le Chat du rabbin - Kazh ar rabin (2011), Marjane Satrapi evit Persepolis (2007, gant Vincent Paronnaud) pe c'hoazh Pascal Rabaté evit Les Petits Ruisseaux - Ar Gwazhioùigoù (2010).

Riad Sattouf, skrivagner ha tresour bandennoù-treset brudet ha seener, a gav gwelloc'h filmañ gant senarioioù

savet a-ratozh (Les Beaux Gosses - Paotred Bray, 2009).

Sevenourien all a gav bremañ danvez da hilligañ o ijin e bed ar bandennoù-treset.

Anvioù brudet e bed ar 7vet arz en o zouez, evel Abdellatif Kechiche gant La Vie d'Adèle - Buhez Adel (2013), palmezenn aour e Cannes e 2013), awenet diwar un albom gant Julie Maroh ; Valérian, sevenet gant Luc Besson e 2017, diwar heuliad Christin ha Mézières, goude m'en defe ivez azasaet Les Aventures extraordinaires d'Adèle Blanc-Sec (Troioùkaer Adèle Blancsec) gant Tardi e 2010.

Bertrand Tavernier en deus tennet ur gomeidienn plijadurus diwar albom brudet Christophe Blain hag Abel Lanzac Quai d'Orsay (Kae Orsay), hag a ziskuilh pezh a chom kuzhet a-dreñv dorioù serret ministrerezh an Aferioù estren, ha Bruno Podalydès a ro buhez e 2018 d'an dudennse bet ganet en tu all da gant vloaz zo, Bécassine.

Rosalie Blum, gant Camille Jourdy, Seuls (Hon-unan) gant Vehlmann ha Gazzotti, Le Petit Spirou (Spirou Bihan), gant Tome ha Janry, Zombillenium gant Arthur De Pins, koulz ha Mort de Staline (Marv Stalin), gant Nury ha Robin, a zo e-touez ar bandennoù-treset all o deus bet un eil buhez war ar skramm vras.





**PALIER ROC'HAN**

**Plasenn Sant-Thomaz – 29800 landerne**

**Pz : 02.56.31.28.15**

**[galerie.rohan@mairie-landerneau.fr](mailto:galerie.rohan@mairie-landerneau.fr)**

**<https://galeriederohan.landerneau.bzh/>**